



KANENN-VEUR AR POBLOU GWASKET


Kan Bale



A-bell ha c'houi c'h eus klevet En erc'heg glas divent ? Pe chas, pe dud skour-




jezet O lenva' hed an hent ? O, poblou kaez milliget, Pe dorfed hoc'h eus



graet ? Ha' veldomp ho pe karet Ho pro dreist holl er bed ? - Achanta breudeur



sklaved, Hor bec'h a vez ho pec'h ! Ra stourmimp holl a-gevret : Ho trec'h a vo hon



trec'h ! Ra stourmimp holl a-gevret : Ho trec'h a vo hon trec'h !

DISKAN

Hor bec'h a vez ho pec'h
Ra stourmimp holl a-gevret : } diou wech.
Ho trec'h a vo hon trec'h !

1

A-bell, ha c'houi c'h eus klevet,
En erc'heg c'hlas divent ?
Pe chas pe dud skourjezet,
O lenva' hed an hent ?
O poblou kaez milliget,
Pe dorfed hoc'h eus graet ?
Ha' veldomp ho pe karet
Ho pro dreist holl er bed ?
Ac'hanta !...

2

O deut, ni 'n'eus ergerzet
Hevelep hentou kriz,
Evel doc'h hon eus gwadet,
Evel doc'h ez omp skuiz.
O deut, p'ho pezo stardet
O skoaz yen ouz hor skoaz,
Ho kwanted ouz hor gwanded,
E tougimp skany hor c'hroaz !
Ac'hanta !...

3

Hon ene 'zo bet aret
Gand arar lemm ar reuz.
Ha gwa neb en deus gwasket
Ar valloz war hor gweuz !
Ha gwa neb en deub saotret

Ar peoc'h doue war hon tal !
Ha mab hol lagad gloazet
Gant mez an daerou dall !
Ac'hanta !...

4

Ma chom hor mistri bouzar,
Ma pad an noz re hir,
En islonk ruz ar c'hlaç'har,
E lugern, yen, an dir.
O Dir, mar deo entanet
Ar gounnar en hor c'hreiz,
Ouz flammou beo da luc'hed,
E lintro Tarz hon Deiz !
Ac'hanta !...

5

P'eo bet hor c'horfou brevet
A-dreuz d'ar vein, d'an drein,
Hor goanag hon eus miret,
Er bed-man faez ha brein.
En dremmwel gwerç'h, hor frankiz,
Dirazomp, ' luc'h ' vel tan.
Ha c'hoarz taer hor yaouankiz
A skiltr en avel c'hlan !
Ac'hanta !...

ROPARZ HEMON

Tit a BREIZ ATAO », gazetenn ar wir Vretoned. Kasit hoc'h ano da M. l'Administrateur de Breiz Atao, Boite Postale 14 - Guingamp, hag e vo kaset d'ec'h eun arverenn evit netra.